

Soniou

EVID AR

Dek son bet merket var B
evid ar PHON

2 wennek ar pez



I

II


BRO GOZ MA ZADOU

Sao Breiz-Izel

ME I

(Eilton gant Duhamel)

(Eilton gant Duhamel)



Taldir

AR BOBL

var Bladiennou « **PATHE** »
PHONOGRAPH.

2 skoed ar c'hant

III

ME HO SALUD, TUD A GALON

(Ecid digerri ar gouellou)


(Eilton gant Duhamel)

Me anvez eur Goulmik
Ter ha gwez meurbed,
Vel eur c'had eo spontik
Na gar ket ar bed,
Koulskoude me a meuz esper
Da gaout an doare
Da c'hounid he c'halon tener
Ha d'hi c'haout d'in-me !


Koulskoude, ma C'houlmik,
Mar teuz m'ankouaet,

(Eilton gant Duhamel)


(Eilton gant Duhamel)



Ni Breiz a galon, karomp hon gwir




Vrôl Bru-det eo an Ar-vor dre ar bed tro-




dro. Dispont 'kreiz ar bre-zel, hon ta-dou ken




mad, A skuil-laz e-vi-ti o gwad.



DISKAN : O Breiz ! va bro, me gar va



Bro. Tra ma vo mor 'vel mur 'n he



zro, Ra ve-zo di-ga-bestr va Bro !

Ni Breiz a galon, karomp hon gwir Vro !
Brudeteo an Arvor dre ar bed tro dro.
Dispont kreiz ar brezel, hon tadou ken mad,
A skuillaz evit-hi o gwad.

(DISKAN)

O Breiz, ma bro, me gar ma Bro
Tra ma vo mor 'vel mur 'n he zro
Ra vezo digabestr ma bro !

Breiz, douar ar Sent koz, douar ar Varzed,
N'euz bro all a garan kement 'harz ar bed.
Peb menez, peb traonien d'am c'halon zo kaër ;
Enné kousk meur a Vreizad ter !

(DISKAN)


Ar Vretoned a zo tud kaled ha krenv ;
N'euz pobl ken kalonek a zindan an nenv,
Gwerz trist, son dudius a ziwann enno.
O ! pegen kaër ec'h out ma Bro !

(DISKAN)

Mar deo bet trec'het Breiz er brezelioù braz,
He iez a zo bepred ken beo ha biskoaz.
He c'halon birvidik a lamm c'hoaz'n he c'hreiz
Dihunet out brema, ma Breiz !



Sao, Breiz-Izel, d'an nec'h da va-nie-




lou Ra-sied gant goad hon c'hen-ta-



dou ! Stagomp d'hor gou-riz hor c'hle-ze-ier



hir, Ra-vo-hon di-vrec'h krenv 'vel dir !



La-varomp holl euz a bouez hor penn :



Breiz da vir-viken ! Breiz da vir-viken !

Sao Breiz-Izel, d'an nec'h da vanniellou
Ruziet gant gwad hon c'hentadou !
Stagomp d'hon gouriz ar c'hlezeier hir,
Ra vo hon divrec'h krenv vel dir !
Lavaromp holl euz a bouez hon fenn :
ANHOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Dihun Breiz-Vihan, ma mam binniget,
Rag an deiz a zo digouezet ;
Hon galv a ziston war benn ar mene
Hag ac'h entana peb ene,
Breiziz deuz peb parrez a ziskenn,
ANHOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

O iouc'hadennou a red dreuz d'an êr,
Beteg goueled al lanneier ;
Ar mammou a zigas ho bugale
Da gaout ho zadou en arme.
N'euz med eur iouc'hen Breiz penn-da-benn
ANHOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Mene Bre ro dorn da Vene-Kragou !
Tridal a ra o c'hribennou.
Ané o-hunan o reier a ruill,
War an enebour kouezont puill,
Gwagen ar mor a lar d'ar wagen :
ANHOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Beteg ar gwalec'hiou ar re bella
Ar c'horn a vrezel a vouda,
Hag a lar d'an holl boblou euz ar bed
E ma beo gouenn ar Vretoned.
An avel mor iud en eur dremenn :
ANHOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Kalonou an holl a zo entanet
Hag an divrec'h a zo nerzet.
Paotred Breiz-Vihan ha Breiziz-Tramor
A skloum o daouarn dreist ar mor ;
Holl C'halloudek, ro 'n Trec'h d'az mibien :
ANHOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

ME HO SALUD, TUD A GALON

(Evid digerri ar goueliou)

(Eilton gant Duhamel)

Me ho salud tud a galon
Fleuren iaouankiz ar c'hanton
A ra enor d'ar vro vretou
Hag a zalc'h uhel ho pannel ;
Hag a zalc'h uhel ho pannel
En despet da iud an avel !

En despet d'an avel gwalorn
Ni chomo bepred dornn ouz dorn
Ha ni welo, deuz a bep korn
Tud e-leiz o tond d'an arme ;
Tud e-leiz o tond d'an arme
Vid difenn gwiriou ar c'hontre.

Evid difenn ar Brezonek
Ken enorus hag ar Gallek
Ar bihana vo kalonek,
Hag an disterra vo nerzuz ;
Hag an disterra vo nerzuz
Rag souza 'drenv a ve mezuz.

Kement Breton a zo d'emp kar
Kemend Bretonez zo d'emp c'hoar
Ebarz ar vro-ma omp holl par,
Dre 'n em zikour 'n eil egile ;
Dre 'n em zikour 'n eil egile
Breiz vo gloriuz heb dale !

Ganeomp eo bet hadet an ed
En parkeier ar Vretoned
Ganeomp e vo ive eostet
Hag ar greun mad e-leiz hon zi
Hag ar greun mad e-leiz hon zi
A vago c'hoaz meur a remzi.


Rog echui ma c'hanaouen
Chom a ra ganin da c'houlouen
Ma kresko bemdeiz ar vanden
Euz ar re zo don en o c'hreiz ;
Euz ar re zo don en o c'hreiz
Gwir garantez evid o Breiz !



IV

AR GOULMIK

(Ton dans)



Me anvez eur Goulmik
Dindan ar c'hoajou
Uhel eo he neizik
Ha teo ar boujou.
Koulskoude me a meuz esper
Da gaout an doare
Da c'hounid he c'halon tener
Ha d'hi c'haout d'in-me.

Koulskoude me a meuz esper
Da gaout an doare
Da c'hounid he c'halon tener
Ha d'hi c'haout d'in-me !

Koulskoude, ma C'houlmik,
Mar teuz m'ankouaet,
Em c'hreiz ma c'halonik
Da garo bepred !
Hag e virin c'hoaz en esper
Da gaout an doare
Da weled da iezou tener
O c'hoarzin d'in-me.

Me anvez eur goulmik
Duze 'barz ma bro
Ma spered klanvidik
A gred eo maro.
Mez koulskoude me meuz esper
Da gaout an doare
Da hadgweled he drem seder
Ha d'hi c'haout d'in-me.

Ha mar dout, ma c'houlmik
Marvet d'an douar
Em c'hreiz ma c'halonik
'Wenvo a c'hlaçhar !
Mez miret a rai an esper
Da gaout an doare
D'az gweld er baradoz seder
E touez an Ele.



V

KANAOUEN an daou C'halouper



Pa oan o vond dre 'n hentehou don
Kreiz tre Raon ha Sant-Malo
Samblez gant eur mignon breton
E teuaz sec'hed d'hon c'halon,
Kreiz tre Ram ha Sant-Malo
Koukou merc'hed Landelo.

E-tal ar bordik euz an hent
Kreiz tre
E oa eun hostaleri goent,
Gant eur pezh bochon vid he ment
Kreiz tre.

— Hola ! Perc'henez an ti-ma
Kreiz tre
Toi donner de bon cidre à moi
Et moi sera content de toi !
Kreiz tre.

— Koz Vretoned, debrerien plouz,
Kreiz tre
Ho kallek brein a zo re louz
Meaz ac'hann buan hag heb trouz !
Kreiz tre

Oa ket bet amzer da zale,
Kreiz tre
Ma teuaz gwaz ha buga'e
Da gas ahanomp da vale !
Kreiz tre

Mez ar Vretoned, daonet vo,
Kreiz tre
Ouz ar C'hallaoued zo garo
Etreze ec'h eo d'ar maro !
Kreiz tre

Selhu ni deuz tol 'barz ar sal
Kreiz tre
Laket zo bet er chiminal
Ar pod kafe hag ar c'hig sall.
Kreiz tre

Pa oa kistion da baëa,
Kreiz tre
— Holla, 'mon me, ô tra la le
Na ramp nemed kemer hon zra !
Kreiz tre Raon ha Sant Malo
Koukou merc'hed Landelo.

Mez mar na zon ket ar c'hleier
Ar c'haon d'ar Barz dilezet
Me zelen goz ebarz an ear
O son klemmus vo klevet.
Hag an noz neb a dremeno
Dre wenojennou ar c'hoat
Da zilaou ar son e chomo
Heb gallout biken pellaat.

Ar Barz zo kouezet var al leur
Vel eun derven diskaret.
An douar d'an hevelep heur
Dindan e gorf zo skarret.
Tra ma save 'n delen santel
En eur dintal 'barz an er
Muzellou ledan ar skoasel
A zerre var ar c'haner.




VII

Ma Bro



MALLOZ AR BARZ KOZ O VERVEL



Selhu me gwelet kant goanvez,
Echu eo ma redaden !
Deuz Gwened beteg Porzantrez
Am beuz sonet ma zelen.
Er c'hastell hag er maneriou
Ha dirag oaled ar c'houer,
En ilizou ar parreziou
Ha ma-hun el lenneier

Ma Bro a zo duze er pellder
Lec'h na c'houez ket ar gorventen !
Na zeu di na tempest na krizder
Na trubarderez nag anken.
Mez eur wabren skler a zo eno
Ha bemdez tomder an heol mad
Hag eun ezen dener o c'houezo
Dreuz da zeillennou glaz ar c'hoat.

Ma Bro a zo duze er pellder
Lec'h ma zo eur c'han peurbadus,
Deuz peb bod ha peb brank ha gaver
E tiskenn kan an evn joaüs.
Eno kresk ar bleuniou ar purra
Ha kresk ha kresk el lann

Ma



Ma Mestrez kollet

Me zo eur bugelik paour
Oc'h hirvoudi gant enkreuz ;
Kollet a meuz gwasoc'h vid aour
Kollet a meuz ma mestrez !
O pegoulz retorni-te
Davedon, ma heizezik ?
Deuz c'hoaz en dro, deuz c'hoaz d'in-me,
Pe gwenvi rai ma c'halonik.

Me zo eur bugel heb chanz
Ar gwiniz gwen meuz meset
Mez unan all dre an drougranz
Siwaz, a neuz hen medet.
O pegoulz retorni-te
Davedon, ma heizezik ?
Deuz c'hoaz en dro, deuz c'hoaz d'in me,
Pe gwenvi rai ma c'halonik.

Me zo eur potr maleürus,
Kaled eo ma flaneden,
Ha ma spered anoazus
Na gav ken nemed anken.
O pegoulz retorni-te
Davedon, ma heizezik ?
Deuz c'hoaz en dro, deuz c'hoaz d'in-me,
Pe gwenvi rai ma c'halonik.

Me garche bout an avel
Vid redek ar vro dre-holl
Da hadkavout an durzunel
Ha zo vidon-me var goll.
Mez birviken na welin
Ma mestrez ken var ar bed,
An avel braz a lavar d'in
Siwaz é 'r paourik... marvet!

— Lar d'in, martolod ma mignon,
Pa strak an tennou kanol
Da betra e zonz da galon
En kreiz an emgann diroll ?
— Me zonz 'barz em heur diveza
Hag em mam baour zo er vro,
Hag em pedan Santez Anna
D'am diwall d'heur ar maro !

— Lar d'in, martolod ma mignon,
Ken pell euz da vro garet,
Da betra e zonz da galon
Pa vez er hamak kousket ?
— Pa ven em hamak paket kloz
Me zonz 'barz ma zi bihan
Hag er c'honchou gonter bemnoz
En dro d'an oaled ledan.

— Lar d'in, martolod ma mignon,
Goude eur veaj en bro pell
Da betra e zonz da galon
Pa vez var hent Breiz-Izel ?
— Me zonz em zud c'han da weled,
En iliz ar barrozik,
Hag en dimezi a vo gret
Etre me ha ma dousik.

Rolland hag Izabel

(Kanaouen goz dastumet gant Laterre
ha Gourvil ha kanet gant ar barz
Taldir.)

Rolland a lavare gwechall
Na d'e bried tener Izabel :
— « Poent ez eo d'in-me partial
Vid moned d'an Turki d'ar brezel.

Sethu me gwelet kant goanvez,
Echu eo ma redaden !
Deuz Gwened beteg Porzantrez
Am beuz sonet ma zelen.
Er c'hastell hag er maneriou
Ha dirag oaled ar c'houer,
En ilizou ar parreziou
Ha ma-hun el lanneier.

Bevet meuz keid hag ar brini
Keid hag an dero kaled ;
Marvet a zo meur a remzi
Aboue ez oun-me ganet.
Chomet oun brema ma-hunan !
N'anvezan ken tud ma Bro,
Ha tud ma Bro, braz ha bihan,
A c'hoarz war ma gwaleurio.


Unan beo c'hoaz, o mar befe
E-touez ma mignoned koz,
Hennez da vihana gasfe
Ma eskern kammet d'ar foz !
Mez siwaz n'euz ken eur c'hristen
Na war zouar na war vor
Ac'h anvez ar zoner telen
A hirvoude dre Arvor.

D'in me, pa vin bremaik maro
Glaz a bed na vo tintet
Ama kreiz ar c'hoajou dero
Den na ouezo vin kouezet.
Ma c'horf, mesket gant an douar,
A vo boued d'ar griennou
Teuzi a rai evel ar c'houar
Vid derc'hel beo ar goulou !

Ma Bro a zo duze er pellder
Lec'h ma zo eur c'han peurbadus,
Deuz peb bod ha peb brank ha gaver
E tiskenn kan an evn joaüs.
Eno kresk ar bleuniou ar purra
Ha korzen ken glan al lili ;
Na neuz ket miesk ar broiou kaërta
Unan a ve henvel outhi.

Ma Bro a zo duze er pellder
En tu all d'an traoniennou don.
Me garche mond hed da hed an er
Da beteg d'ei, bro ma c'halon,
Me garche kaout dioueskell buan
Vel re ar goulmik vihan wen
Ha treuzdidreuz a nenv ledan
Vid mond d'am bro, da virviken !

O Bro, a zo duze er pellder
Huanadi a ran varnout,
Ha 'n eur veuleudia da gaerder
Em c'halon e sao an hirvoud.
Pegoulz ec'h in d'ar vro a garan,
D'ar vro lec'h e ma ma c'halon ?
N'oun ket, siwaz, mez c'hoaz e sonjan
D'am Bro, kreiz tre an daou vor don.






Rolland a lavare gwechall
 Na d'e bried tener Izabel :
 « Poent ez eo d'in-me partial
 Vid moned d'an Turki d'ar brezel.

1 X

KANAOUEN AR MARTOLOD



— Lar d'in, martolod ma mignon,
 A red ar mond penn da benn
 Da betra e zonzj da galon
 Pa groz an dour 'n az kichen ?
 — Me zonzj neuze d'am dousik koant
 Am gortoz en eur ouela
 En Lokrist, parroz Trabriant
 Ha ma spered a grenva !

— Bugel an ochou ma mignon,
 Martolod a Vreiz-Izel
 Da betra e zonzj da galon
 Pa vez var ar wern uhel ?
 — Pa ia plen al lestr gant ar mor
 Me zonzj d'an traou dremenet
 Ma spered a guita e glor
 Vid nijal d'am bro garet.

Te ouel dourek d'in-me breman,
 Kaon a zougi d'in var da veno,
 Eun all a-benn nemeur aman
 A zeui da zec'ha d'id da zaelo ! »

— « Mar teufen da ankounac'hât
 An hini am beuz kement karet,
 Deuit dirag va daoulagad
 En spes da rebech d'in va fec'hed ! »

Rolland a zo maro siwaz,
 Izabel he deuz keun hag anken,
 Mes oa ket achu mad ar bloaz
 Eur markiz a zeuaz d'hi goulenn.

Pa oa an holl dud asamblet
 Ar banket a gomansaz soudenn
 Mez oaint ket c'hoaz peurazezet
 An den maro oa en o c'hichen.

Astenn a ra e zorn pounner
 Kaër he deuz gouela ha deplori,
 Gant an douar int bet lonket,
 Ha c'hoaz o c'hleofot o hirvoudi.



(1910)